

AVEL HON LENNEGEZH O C'HWEZHAÑ (59)

Roparz Hemon, Guy Étienne, Aldous Huxley, Jim Morrisson ha William Blake (1757-1827), pebezh *casting*, Salver ! Troellenniñ, mont-dont, amprestañ-prestañ en kaoter virvidik lennegezh republik ar bed, ul lennegezh douget gant sonerezh lañsus The Doors, douget gant mouezh hud Jim Morrisson. The Doors o devoa dimezet lennegezh ha sonerezh rock, blues and so on.

Dorojoù ar merzhoud a oa tremenet a rumm da rumm, ur soñj estaolet gant ar William da gentañ hag adkemeret hardizh gant an Aldous. Betek ur strollad tud yaouank, en Kalifornia, da ober o anv anezhañ. Diouzh mouezh hud ha tamolodus hon Jim, *Break on Through* :

« Te oar eo distrujet an noz gant an dez

An noz a rann an dez

Klasket redek

Klasket kuzhat

Toull da vont en tu all

Toull da vont en tu all

Toull da vont en tu all

Emholc'het hon flijadurezh amañ

Fozet hon zeñzorioù amañ

Ha gallout a rez c'hoazh kaout soñj

Eus an taol hon devoa gouelet ? »

Met piv all ? Guy Étienne, an hini eo, a gont dimp penaos e oa emgavet gant William Blake. A Memorable Fancy, emezañ !

« Ur sadorn da noz a viz Kerzu ma soñjen bezañ va unan oc'h ober va zro e-barzh iliz Lokronan, setu ma tiskoachas e-harz piler sant Roc'h un den en e goazez. Diflach da gentañ, e stouas e benn hag e roas din da c'houzout edo eñ, William Blake, ouzh va gedal. Diskouez a reas ur plas war ar skaoñ en tu kleiz dezhañ ha diouzhtu ez eas din (ne oufen lavarout hag e saozneg pe e brezhoneg e voe hon emziviz). »

Gwriet an treiñ hag ar c'hrouiñ en danvez peurvarzhoniell hon Guy, Gwion mar karit, evel a vije graet dioutañ ivez.

« Lorc'h ar paun zo klod Doue.

Gadalezh ar bouc'h zo haelded Doue.

Konnar ar al leon zo furnezh Doue.

Noazhder ar vaouez zo labour Doue.

Re a c'hlac'har a c'hoarzh, re a levenez a leñv.

Krozerezh al leoned, skuermerezh ar bleizi, rutennoù ar mor er stourm, ar c'hleze distrujus zo tammoù peurbadelezh re vras evit lagad an den.

Al louarn a daol ar bec'h war an trap, n'eo ket warnañ.

Speriañ er joa, gwilioudiñ er boan. »

Lod eus Krennlavaroù an Ifern... Hon Gwion en devoa tapet lip-ha-lip arz an treiñ. Moarvat eo dre ma kave war e hent skridoù tost d'e galon. Evel *Raksantad*, Rainer Maria Rilke, na vije ket bet dinac'het gant hon Roparz kennebeut :

« Me zo par d'ar banniel gronnet gant ar pellder.  
Me glev an avelioù o tont ha din d'o c'haout da vuhez,  
pa n'eus tra c'hoazh o fiñval en traoñ,  
kloz didrouz an dorjoù, sioul ar siminal,  
n'eus prenestr o krenañ, ponner eo c'hoazh ar poultr...

Me avat a glev an avelioù, enno houlennoù ar mor,  
ha 'n em zisplegan, ha 'n em asplegan, ha 'n zistaolan  
va unan penn er gorventenn. »

Ar memes familh barzhonegoù : karmoù da ezteurel ar c'hizidig, ar santoud, ar merzhoud, a-dreuz an amzerioù, a-dreuz ar c'horventennoù. Hon William ur gwir rakweler, heuliet gant rakwelerien all. Hon Roparz ne oa ket bet diseblant, pell alese... *Ahania*...

« Astennet on war wrimenn an islonk,  
Da goabr teñval a welan o sevel,  
Da goadoù du, da froudoù a welan,  
Ur gouelec'h spontus d'am lagad.

En ur leñvañ, e kerzhan dre ar reier,  
Dreist da gevioù, da draonienn ar marv,  
Perak ec'h eus graet fae war Ahania,  
Va harluet diouzh da vezañs skedus  
En ur bed a zigenvez ?

Ne c'hellan ket stekiñ ouzh e zorn,  
Na leñvañ war e c'hlin, na klevout e vouezh  
Ha stouiñ, gwelout e lagad  
Ha laouenaat ; na klevout e gammed ha  
Va c'halon tridal d'an trouz boemus !  
Ne c'hellan ket pokat d'al lec'h  
A voustras e dreid skedus.  
Kantren a ran dre ar reier  
Gant ret garv. »

Na berv kaoter al lennegezh : ur skrivagner levezonet o levezoniñ skrivagnerien all, o levezoniñ barzhed ar sonerezh rock. Ur wezh ouzhpenn azoniad ul lennegezh digor, ul lennegezh maget gant lennegezhioù all. Pell zo n'eus ket a vevennoù etre al lennegezhioù. Hag a zo bet ? Pell zo e sellont an eil re ouzh ar reoù all evel c'hoarezed dizirouerus. Pell diouzh ur sell enk ha gaonac'h a glasker lakaat war hon lennegezh. Labour *Gwalarn*.

Herve Bihan

Levrlennadur

William Blake, Barzhonegoù troet gant Roparz Hemon, Gwalarn, Nnn 12, 1927.

Guy Étienne, Krennlavaroù nevez an Ifern, Preder, 2005.

The Works of William Blake with an Introduction and Bibliography, Wordsworth Poetry Library, 1994.

Aldous Huxley, The Doors of Perception, Londrez, 1954.

The Doors, pladenn gentañ, label Elektra, 1967.